



## CANTIC SPIRITUEL

VAR GLACHAR AR VERC'HEZ.

*Var ton Michel Nobletz.*

---

**J**ESUS ra vezo meulet hac e Vam beniguet,  
A-zeir a wir galon sicour ar Vretonet;  
Revelet en devez bet da eun den dign a feiz  
Scriva eur C'hantic nevez da bublia en Breiz.

Pa e güelas, an den-mâ a voe estonet bras;  
Ie Mab etre he divrec'h goude disgen ar groas,  
E divrec'h hac e bizaj voa rusiet gant ar goad :  
Me vel e oll esperanç eur sujet admirabl.

Me meus qement a drue, emezi, ouz an oll,  
Me garfe gallout miret ne dae den da goll,

Deut òn d'oc'h avertiss, m'ho ped, ne vanqit  
get,

Disclêria caràr sicour ar bec'herien dallet.

Itron, c'houi zo qer caret gant ho Mab be-  
niguet,

A guement a c'houlenfot ne viot refuzet,  
Ha possubl ve e renqer caout eur speret humen  
Da obteni ho reget evit ar bec'herien.

Me a zo qen ordinal evel ma red an dour,  
O c'houlèn digant ho Mab d'ar bec'herien re-  
cour,

Hac o veza respontet / me n'ho refuzàn get,  
Ne allàn get pardoni da nep ne c'hoantà get.

Var ze eta, christenien, preparit ho speret  
Da receo en ho calon ar c'homzou' anonet  
A c'henou sacr ar Verc'hez; gant truez ou-  
zomp-ni,

Biscoas ne glêvas christen qen truezus hañhi.

Va Jesus, leun a druez, permetit gant ho  
Mam

Ma ellin antrepreni e dezir gant estlam;  
Estranch a bep den habil consideri a vouez

Gallout güela a galon ha cãna assambles.

Qement den e zelaouo a bep seurt qalite,  
 Zo crissoc'h eguet eun tigr, eguet eulleon goe,  
 Ma na ell dont da vouela pa entento e lenn,  
 A ell donet da zõnjal n'en dẽ qet güir gristen.

Vit an oll asistantet, Rouanez, me ho ped,  
 Contemplit ho clac'har vras, ma cassaint ar  
 pec'het;  
 Ma servicho ho taelou da voelc'hi hon ene,  
 Me zezir, à wir galon, remission dẽze.

Qement den a regreto e amzer dremenet,  
 Hac a güittai e viçou en amzer da zonet,  
 Me assur en devezo remission plenier,  
 Henvel ouz ar Vadalen, güechall gant hor  
 Zalver.

Me garfe, en güirione, gout ar sujet a ze,  
 M'hopoe qement a c'hlac'har e durant ho pue;  
 Biscoas ne voe mam er bed qen truezus ha  
 c'houi;  
 Eus ho pers ne veritjoc'h glac'har na melconi.

Pa anonças Gabriel e tougjen va Doue,

E recevis eur joa vras em c'horf hac em ene ;  
 Mes ur feunteun a c'hlac'har em c'halon a zavas ,  
 Qeit ha ma chomis er bed, nep amzer na cessas.

Pa zisclêryas Simeon etre ar brophetet ,  
 E voa deut ar Mab-unic da redima ar bed,  
 Fachet voe ar Judevien pa glêvjont lâvaret  
 E c'hanjen eur c'hrouadur, hep goalan va  
 güerc'hdet.

Me meus en douguet nao mis etre va daou  
 goste ,  
 Qen trist ha qen glac'haret , injuriet gante ,  
 Gant qement a nec'hamant hac aon eus va bue ,  
 Penevert va c'honductor Joseph am asiste.

Pa dinessas an amzer da zonet var ar bed ,  
 Me zezire e c'henel en eur plaç prepalet ;  
 Mes Doue a bermetas ha ma viont rentet  
 Entre e adversourien er guær a Nazareth.

Da ben eun nebeut goude e voen avertisset  
 Ma quittäjen ar c'hontre rac ne vije lazet ;  
 Hennes voa an nec'hamant , balamour d'ar  
 buguel ,  
 Rencout quittäat ar c'hartier pe' lacat da vervel.

O Tad leun a drûgare, sellit ho crouadur  
 Hac e vam qer glac'haret o vont en avantur  
 Gant qement a baourente. I m'ho ped d'o asista :  
 Allas! me ne meus pouvoar nemet gouela outâ.

Pa voan êru en Ejypt e sônjen caout repos,  
 Mes en nebeut a amzer e chenchas direpos;  
 Herodes a ordrenas elec'h ma commande,  
 Ma vije incontinant lazet ar vugale.

Na gafet speret humen a elfe disclêria  
 Ar glac'har am possedas pa glêvis qement-mâ,  
 Q tont da gonsideri eo an occasion  
 E lazer ar vugale vit laza ar mignon.

Meurbet e zôn estonet o consideri ze,  
 Ma anduras er hed-mâ qement a baourente,  
 Qement a voa er bed-mâ en devoa oll crouet,  
 Hac a zentje sur outàn, ma vije e zouet.

Pa bec'has hon tad Adâm e voamp oll ruinet,  
 Ma tisplichemp da Zoue en devoa hor c'hrouet,  
 E zajemp oll d'an ifern, den n'en devoa repos;  
 Sujet voamp da Lucifer, serret voa'r barados.

Dre drue ha carante eo'h ordrenas an Tad.

Da gass ar Speret-Santel da. incarni e Vab,  
 Ar-boanniou a verite e oll grouadurien,  
 A zeziras da gouzan hervez Doue ha den.

Pa voa êru an amzer a voa determinet,  
 E yas gant e zisqibien d'ar jardin Olivet,  
 O veza oboissant da volonte e Dad,  
 Elec'h drouc a veritemp, e tezir c'hoashormad.

D'ar güener mintin golo e teu Yan da velet,  
 Hac én en noas divisqet qazi voe trelatet,  
 Hac e lavaras : Mari, emâ eo ar glac'har,  
 Ha Mab a zo gemeret eguis eur c'hriminal.

Qement ma heulias velet e zon êt d'ar mene,  
 Ma finis dizesperi pa na ellen mervel,  
 O vont etre daou laeron n'o anaveent qet,  
 E oad, e guic, e groc'hen a voa oll dispennet.

Pa voe divisca ar zê, e velen e estqern,  
 Neuze e velis c'hoezec o chassa gant qerden  
 Var e dreid hacc zivrec'h ha diout toulou ar groas  
 Sur e verite'r pec'her caout punition vras.

Pa voe goroet en noas a enep an amzer,  
 E soufras injuriou bras etre an daou voler :

Te a lavaras bea Roue ar Judeanet,  
Ni es laqa cabiten etre ar brigantet.

Qent eguet ma finissas ne refusas nicun,  
Meritou e bassion d'an oll a voa comun,  
E roas demp da entent ne voa den refuzet,  
Digor vo ar barado's qen a vo fin ar bed.

Nepmet eiz ha tri-uguent e zê bet seiz mil bla  
Ar barados voe serret o c'hortos qement-mâ;  
E a c'houerzàn evidomp, deàn omp oblijet,  
Nep a gredo d'e lezen ne vezo qet collet.

Dre verit e bassion, Itron, eo hor prenas,  
Ne receyas nep hini, hon dle oll a baeas,  
Ha gouscoude pa lennàn, e cavañ rapportet  
Pa zeont eus ar bed-mâ calz a dud zo daonet.

Qer bras voe e garante evit e vngale,  
Ma permet da bep hini ober e volonte;  
N'ellont qet lavarar qeit ha ma int er bed-màn:  
Me zo crouet gant Doue evit sujet deàn.

Disqennit, me ho suppli, va Mab, demeus  
ar Groas,  
Vit m'en ambrassin amàn var ar glinoat glas;

Emedi er baourante, var an teil eo ganet,  
Hac en noas ez è maro, hac en noaz entèret.

Me bed Joseph va mignon abers Doue an Tad  
Da ober eur bez neve evit laqat va Mab,  
Pa vezo ressuscitet, ha na vurmuro den,  
Pa vezo ressucitet na ve qet va Mab ve.

Pa voamp eus e entèri, neuze ec'h êruas  
Ar Judevien arrajet hac a epouvantas,  
Ma quittas va mignonet gant spout ouz ogüelet,  
Hac e chomis va-unan hep gout pelec'h monet.

Va Zad benignet en' ên, hac én a voe biscoas  
Eur femelen var ar bed a eur glac'har qer bras?  
Cetu me abandonet var menez Calvari;  
An nôs a zo o tonet, ho pet truez ouzin.

Autrou Doue, va C'hrouer, roit patientet,  
Gant va Mab, pa voa er groas, me voe recom-  
mandet

Deân da veza va Mab, ha me da Vam deân,  
Hac ez òn quittet gantàn ha lêzet va-una

Me ne meus qet ho quittet na birvigen na rin,  
Bet òn o pourvea cambr evit ho repui,

Qemerit patiantet, Mari, na vouelet mui,  
Dont a rai aben tri de ho Mab d'ho consoli.

Ne voa speret qen parfet nac Elez en ênvou  
A garfe bea er gampr da glêvet ar c'hanvou  
A ra ar Vam a druez gant ar glac'har d'he Mab,  
Criz ê ar galon e zônj na deufe da dristat.

Ne eo an druezussa a voe biscoas er bed,  
Gant an oll ôn disprizet, cassêt, dizenoret,  
Eguis eun oan egaret' etre al leoned,  
Pa zon lêzet gant va Mab, va Zad va sicouret.

Allas ! pelec'h e zin-me pa vezo deut an dez ?  
Mui a valiç zo ouzôn eguet a garantez ;  
Ma sortiàn, ne velin nemet an tirantet,  
A garfe va merzeria, va Zad, mar permetet.

Er plac-mâ e voe Mari o vouela nôs ha deiz,  
Hep na debri nac eva e spaç eus a zri deiz,  
O contempli ar boanniou a verit ar pec'het.  
Truez eus ar bec'horien en amzer da zonet.

Pa ressuscitas va Mab, e teuas d'am güelet,  
Ha me goulen digantàn : e pelec'h e zoc'h bet ?  
O serri pors an ifern, va Mam, eo e teuàn.

Qement a voa oc'houzàn a meus lamet a boan.

Calz a dud malin a vo va goude var ar bed,  
 Hac a vo qen efrontet, va Mam, da lavaret :  
 Pa n'en deus nemet ur plaç è rete vemp salvet,  
 A souille ar Barados, va Mam, gant o sec'het.

Va Zalver, me ho suppli, ha n'am dilezit qet,  
 Recommandit va ene d'hon Tad, crouer ar bed ;  
 Ho pezit sònj ac'hanòn e barados ar gloar,  
 Ma vin caret en êvou, pá n'en don en douar.

Tri bla varnuguent goude ez eo bet en buez,  
 Da gourachi an ebestel da bublia ar feiz.  
 Qement graçou na vertuz a zisqen en douar,  
 A dremen dre e daouarn dre vertu e glac'har.

A het tri bloa varnuguent bemde e zê Mari  
 Da zaludi Croas he Mab var menez Calvari ;  
 Biscoas n'en em gontantas o veza deiz ha nôs  
 O reqeti ma yaze an oll d'ar barados.

Pa gonsideras he Mab, n'en em gontante qet  
 Da reqeti digantàn quittä poanniou ar bed,  
 E tigassas Gabriel en he c'hambr eus an êe,  
 Daannonci da Vari pe dà heur e varvje.

Pa ho saludis qenta, Mari, me a zonie  
 E vije contantamant ha joayou ho pije,  
 Nemet glac'har ha poaniou goude ze noc'h eus  
 bet,  
 Ha c'houi ve oboissant da zilêzel ar bed?

Evit dilêzel ar bed me ne rân qet a gas,  
 O quïttat ar gristenien e meus melconi bras;  
 Chom da vouela evito a garfen er bed-mañ,  
 N'en daë den d'æn ifern evit anduri poan.

En geit ha ma tezire Mari chom var ar bed,  
 Ho Mab hñ car qer parfet ha no refuzo qet;  
 Daouzec blas ha tri-uguent aboe e zoc'h er bed,  
 Poent eo quïttat ar glac'har ha hea consolet.

Va Mab, me a zezire vize an ebestel  
 Presant ouz va asista pa deujen da vervel :  
 Va guervel a rent o Mam hac o zoulajamant,  
 Ma lezin dezo va c'hoñf evit va zestamant.

An ebestel egaret a bep contre a bell  
 A voe souden assamblet neuze var eur goabren,  
 Harentet en un instant er gambr ar miracl bras  
 Da zonet d'e asista, rezervet Sant Thomas.

Thomas neuze en Ejjypt a voa neuze rentet,  
 Ne v~~o~~ qet e pe fêçon, er Jardin Olivet,  
 Evit gallout rêi rapport ar myster admirabl,  
 Er plaç ma velas e Vestr o c'hoezi dour ha goad.

Dre eun inspiration e tisqennas timat  
 Eus a Jardin Olivet e traouyen Josaphat,  
 Ma cavas an Ebestel, hac int oll glac'haret,  
 O voela d'o Mam Mari e devoa o c'hüittet.

Disqüelitdin, va breudeur, ar bez ma voe Mari,  
 Rac me a gred assuret bremâ ne medi mui;  
 Me meus-hi anaveet o vont corf hac ene  
 E compagnunez he Mab, ar Zent hac an Æle.

Te, eme Pêr da Dthomas, a zo incredulus,  
 Ne gredes qet e vije ressuscitet Jesus,  
 Penevert ma e laças da douch e bemp gouh~~er~~  
 Ha bremâ ne gredes qet e ma er bez Mari.

Me ho suppli permetit ma tigorin ar be,  
 Ha neuze me a rêi d'êc'h güelet ar virione;  
 Pa voe digoret ar be, ne voa netra enhâ  
 Nemet a lincel a voa laqet d'he liara,

Nemet Done ne alie disclêria ar glac'har.

Qement e voent estonet ma coeent d'an douar;  
 Ne allent qet caout couraj da zevel ac'hane,  
 Qen ne vijen consolet gant an ael eus an êe.

Pa vo ar varn jeneral va c'halon a ro din,  
 Ne meus qet bet var ar bed qement a velconi  
 Evel am bezo neuze, pa glêvin ar re daonet  
 O c'houlen ouzin sicour, ha me ne ellin qet.

Me a gred pa c'houlennot e cavo agreabl,  
 Ne zeus netra imposubl da Jesus-Christ ho Mab;  
 N'en deo qet bras ar myster deoc'h caout ze  
 digantâ,  
 Evel ober an douar hac an ên a netra.

Me a reget ouz va Mab da rei pardon deze,  
 Mes ne vezo nemedon e prezeg evite;  
 An oll bredicatoret, memes an ebestel,  
 A vezo sur em enep avocadet contrel.

Va Mab, goela a reont ha n'o c'honsolit qet.  
 Me a c'houlen evito ma viont consolet;  
 Ma noc'h eus true oute, sellit ho Mam Mari  
 Zo dirac ho Majeste-ger glac'haret hac hi.

Va Mam guéz, ne deo qet me zo qiriec d'ho  
 clac'har,

N'e devoa qet meritet pa voan var an douar;  
 Brassoc'h myster e cafen rêi o fardon deze,  
 Eguet pa grouis ar môr, an douar hac an êe.

Birviqen oc'h nec'hamant ne allac'h va miret,  
 Mar disqennont d'an ifern ha mar bezont dao-  
 net;

Abalamour d'an divron en deveus o lêzet,  
 Ho pezit true oute, n'ho c'hondaonit-hi qet.

Me garfe em be gallout da zisqûez a c'halon,  
 Da reqeti diganêc'h dezo remission,  
 Pa na servich va daëlou, va divron ha va lèz,  
 Va Mab, bras eo ho coler refus ar pec'her qès.

Va Mab, it d'ho parados gant ar re ze salvet,  
 Ha va lezit er plaç-mâ evit goela bepret,  
 Gant an douar em daoulagad me o güelc'ho qer  
 net,

Dign davont d'arbarados n'oc'hondaonit-y qet.

N'ellent-y qet beza net ha qüittat o fec'het,  
 C'houi a voar ar virione ar pez a meus soufret;  
 Ne meus netra espernet d'o renta evit poan,  
 Meprizet o deus va goad, ret ê dêze gouzan.

Ennes vezo an estlam pa vezo deut an de,

Qement a vezo presant a vo spontet neuze  
 O clêvet ar Mab, ar Vam n'en-ein accordont qet,  
 O sônjal er re daonet prest da veza barnet.

Jêsus, ha c'houi a garfe e coesemp a enep?  
 Ni hor boa grêt hon dever etrevoampvar ar bed:  
 Ni a garfe assuret ne vijemp qet crouet,  
 Da vea control d'ho Mam a zo gen estlamet.

Mari, pa ê ordrenet, e zêo ret din parlant:  
 Ni hor boa-hi instruet e teuje'r jujamant.  
 Mar dê ni a zo manqet, ni reqet diganêc'h  
 Evit ma vimp oll salvet da vont d'an ên ganêc'h.

Jesus, ni a zo prezant dirac ho Majeste;  
 Ni a zisqüelo dezo an hent demeus an êe;  
 Ni reqet diganeoc'h, mar dê ni zo manqet,  
 Ha ma viont-i salvet, ha ni oll pardonet.

Va Mam, ha c'houi gred bremâ me n'ho refu-  
 sin qet,

Me ne meus qet o c'hrouet evit bea daonet:  
 An diaoul o deus choazet da conductor dêze;  
 Chom a raint en ifern hed eun eternite.

Ne ven qet eur barner just ma lamfen digante

Qement o devoa choazet pa voant en o bue;  
 Me varvas en ho presanç da bêa o rançon,  
 Hac a ro brêma deze va malediction.

Sònjomp eta, christenien, er glac'har a Vari,  
 Gant truez eus hon ene requetomp diganti  
 D'en em viret ouz pec'het na vezomp qet qefret  
 D'hor Mam Mari da voela ouz hor güelet daonet.

Itron Vari a Druetz, entre m'omp en bue,  
 Pedit ar Speret-Santel d'hon inspira bemde  
 Da garet, da zervicha ho Mab gant dilijanç,  
 Hac en bon heur divea da gaout hoc'h asistanc.

F I N.




---

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.